



EVIT SIKOUR AR PRISONNIER

Gant ar barz PABOR KASTELL

Ton : *Ar Paimpolaise*

I

Selaouit mad ta holl va zudou
A sonjit en or soudardet
A zo pell bras ouz familiou
Pell bras hag ive chagrinet
Bredeur a kerent zo prisonnierien.

II

Nag a verc'het a zo o unan
O gwazet vit difen o Bro
Deuz lezet o bugale vian
O ziegez a kement zo
Breman prisonnier, pad pegeit amzer.

III

Nag a zaelou zo gant ar brezel
Ive na pebez ran galon
Ez eo gwelet potret Breiz-lzel
Pell diouz o Bro, diouz o c'hanton
Klevit mignonet, c'houi vo sikouret.

IV

Potret cleac'h eva er banne
Unan eb ken da viana
A c'houi merc'het er banne kafe
Danvez unan n'eo ket kais tra.
C'houi rei alusen d'ar brisonnierien.

V

Eurus a re zo deuet d'ar gear
Potret Yaouank, tud dimezet
Micherourien, labourer douar
Sonjit ouz a re zo chomet
Bebez ran galon, beza er prison.

VI

O ! Breiz-lzel gwel da vugale
Zo pell bras ouz o Bro garet
Assamblez ganeomp pedit Doue
Vit diouz an drouk ven diwallet
N'dervez a deio an holl dei an dro.

DISKAN



Koumerit ta en tammik truez
A sonjit er vad en dud keiz
Diskoesit pennaons en o Parrez
O peuz er galon en o kreiz.



IFIK MOAL.